

Ur greizenn all e Brenniliz ?

Abaoe un nebeut bloavezhioù e vez kaoz deus ar « blackout » a c'hallfe kouezhañ war an elektrisite e-pad ar goañv : «Tamm tredan ebet ken, poent eo deoc'h klask pelec'h emañ ar gouloù-rousin kozh pe ar c'houlouenn e foñs an armel !»

Divizet en deus Kuzul Rannvro Breizh gant ar «*Pacte Electrique breton*», a-du gant ar Stad, sevel e departamant Penn-ar-bed ur stal da broduiñ elektrisite gant ur sistem anavezet dindan an anv berr «CCCG¹».

Kroget eo ar galv evit ar c'hinnigoù-sevel, dibabet e vo an oberier e Meurzh 2012 sañset : EDF (e Gwipavaz), ENEL (e Brieg), Direct-Energie (e Landivizio), EDF (e Brenniliz), unan all c'hoazh ?

Un raktres memes mod, un tammig bihanoc'h, n'eo ket bet asantet gant tud ha dilennidi Aodoù-an-Arvor.

Ha neuze, petra ne ya ket mat gant an afer-se ?

Ment an uzin

Evit delc'her penn d'an diaezamantoù a vez a-wechoù gant an amzer yen, e vefe ret produiñ 120 MW.

Perak ta neuze sevel ur greizenn 450 MW ?

Penaos e ya an uzin-se en-dro ?

Ret eo devañ gaz evit lakaat an droellrodoù da dreiñ. Neuze diwar an tan ifern-se e vo produet tonennoù CO2 peogwir e vo o labourat e-pad 4000 eur bep bloaz, dioksidenn nitrogen ha sulfur, poultrennoù munut.

Ret eo ivez distañ ar sistem. Gant dour ? Ya met implijet e vez dija dour al lenn evit an dud. Gant aer ? Neuze e vo savet tourioù uhel da ober aezhenn. Ar pezh a zo, an aezhenn-se a vo saotret gant produoù klorek laket e-barzh evit an em wareziñ deus kleñved al «légionnelles».

An randamant

Mat kenañ eo ar gaz evit tommañ an tiez pe evit produiñ dour zomm (askor : 95%). Ya met evit produiñ elektrisite e vez kollet 50% eus an energiezh diwar an dommder o vont kuit er maez. Da c'houde c'hoazh ez eo ret kontañ an energiezh a vez kollet er linennoù elektrek. Ul lonker energiezh !

Deus pelec'h e teu ar gaz ?

Ar gaz a deu deus foñs an douar met n'eo ket deus Breizh evel-just ! Deus Bro Aljeria pe Rusia e vez degaset, keit ma pado, hag e ya ar priz war gresk bep bloaz. Ouzhpenn-se, e teuio un devezh bennak, a-benn un nebeut bloavezhioù, e vo bet devet tout.

Da piv e profito an afer-se ?

Sañset emañ an uzin da vezañ savet war gont an oberier (EDF e Brenniliz). Ya met ar frejoù evit degas ar gaz hag evit sevel linennoù elektrek a vo paeet gant ar Stad, da lâret eo diwar an talioù.

Dishualet eo bet marc'had an elektrisite : paotred an arc'hant bras a zo war ar reñk evit profitañ. Siwazh, n'emaomp ket ken 'barzh spered ar servijoù publik.

Reiñ labour d'an dud ?

Prometet eo bet reiñ labour da 200 pe 300 a dud e-pad ar santier hag a bado 2 pe 3 bloaz, ha da 20 pe 30 a dud da c'houde. Ret eo soñjal memestra e vo savet un uzin ken dilikat gant tud a-vicher o vont d'an eil santier d'egile ha n'eo ket gant tud ar vro. Posupl eo e vefe ar c'hontrol a-benn ar fin :

E Brenniliz ez eus dija

_ ur greizenn diduiñ nevez flamm evit ar vugale : daoust ha ne vo ket ankeniet an dud o kas o bugale tost d'ul lec'h ken dañjerus ha gant aer saotret ouzhpenn ?

_ un dachenn kampiñ : daoust hag e teuio tud da gampiñ c'hoazh e-kichen ur stal seurt-se ?

_ ar Stal «Salladurioù an Are» : 150 a dud o labourat e-barzh. Petra sonjont ?

Al labour douar hag an douristelezh a vo tapet ivez abalamour d'ar saotradur. Petra a dalvezo an tiez tost d'ar greizenn neuze ? Ha gant piv e vo paeet al labour rapariñ an hentoù ? Gant tud ar vro evel just !

Gwellañ tra da ober evit an energiezh : espern

Ar goulenn kreñv a vez a-wechoù war an elektrisite e-pad ar goañv hag a deu deus re a dommerezh tredanek peogwir n'eo ket izolet mat an tiez. Ret e vefe sikour muioc'h an dud da ober an dra-se hag e vefe diouzhtu nebeutoc'h a uzañs.

Arabat chom da c'hortoz, poent e vefe ober memes mod ez eo bet graet e lec'h-all e Breizh : staliañ un embregerezh evit produiñ danvezioù propr e-keñver an endro : perak pas gloan-koad evit izoliñ an tiez dre skouer, ha meur a dra all c'hoazh. Ret eo da Stad ivez sikour un tamm mat muioc'h ar produiñ energiezh en ur mod-all ha n'eo ket kas muioc'h a CO2 en aer c'hoazh. Breizh a zo plaset mat evit sachañ muioc'h war energiezh ar biomas, an dour, an avel ha, dreist holl, ar mor ! Poent eo dihuniñ, EDF had e genseurted n'emaint ket war an hent mat !

¹ Centrale à cycle combiné gaz